

KANTIK DA SANT HERVÉ

Patron Lanhouarne



Diskan :

Patron karantezuz,
 Sant Hervé benniget,
 Grit eur zell trugarézuz,
 Ouz hor bro, ni ho ped:
 Kendalc'hit enn ho parrez
 Lintrus feiz hon tud koz
 Evit ma zaimp eun dervez
 Ganeoc'h d'ar baradoz.

I

O Sant Hervé benniget, selaouit or pedenn,
 Tòlit eur zell a druez war ho pardonerien:
 Mirit en o halonou ar hredennou kristen,
 Ar feiz ho peus prezeget gwechall e Breiz-Izel.

II

E dad anvet Hervian, hag e vamm Rivanon
 Oa tud a zoujans Doue, kristenien a galon;
 Ar henta komz 'doa desket d'o hrouadurig karet
 Oa ano dous ha tener ar Zalver benniget.

III

N'o doa nemed disprizans 'vid ar bed safaruz,
 Ne glaskent 'med eun enor: gwir garantez Jezuz;
 Savet er skol hez santel gand e dad hag e vamm.
 Herve, evel eun èlig, 'gerze pur ha divlamm.

IV

Ne oa ket ouspenn seiz vloaz pa zave gwerzennou
 Ken kaer war an eùrusted a gaver nenvou,
 Ma Zante ar beherien o halon o tridal
 Pa glevent mouez Herveig. anvet ar "barzig dall".

V

Evurzudou estlammuz, anavet tro-war-dro,
 A halve d'e vanali euz pevar horn ar vro;
 E aliou, e furnez a zeske d'ou tadou
 Beva santel hag eüruz 'n eur greski o madou.

VI

Etouez an Holl ilizou savet e Breiz-Izel
 'Vid enori ar Zent koz ha goulen o skoazell,
 E Lanhou-arne dreist holl e vez kavet unan
 Eur gaer a iliz savet uhel war bez ar Zant.

VII

Dour e feunteun 'zo brudet, en deus galloud meurbed
 Da barea an daoulagad, peb droug ha peb klêned;
 Rag-se da seiz e bardon euz peb korn ar barrez
 Gand feiz a fisianz vras ar bobl e teu gand prez.

VIII

Evel gwechall on tadou, ni felle déomp kenderhel
 D'ho enori, Sant Hervé, ha da zont d'ho pedi
 Dirag ho religou zantel setu ni daoulinet:
 Benniget-ta ho parrez, o Patron ken karet.

 AR MEULEUDIOU (Les Louanges)

Meuleudi da Zoue ! Meuleudi d'e hano santel!
 Meuleudi da Jezuz Krist, gwir Doue ha gwir den!
 Meuleudi da Ano santel Jezuz, Meuleudi d'e galon zakr!
 Meuleudi da Jezuz, e Sakramant an Oter!
 Meuleudi da Vamm Doue, ar Werhez glorius Vari!
 Meuleudi da Vari, konsevet hep pehed!
 Meuleudi da Vari douget d'ar baradoz!
 Meuleudi da Ano Mari, Mamm ha Gwerhez!
 Meuleudi da Zant Josep, pried glan ar Werhez Vari!
 Meuleudi da Zoue, dre an elez hag ar zent euz
 ar baradoz!
